

**Garreg** (Toussaint René Marie Le Garrec) (Hollsent Reun Mari ar Garreg) (Ar Barner)  
Kergrist-Moelou 1862 – Montroulez 1939.

Da heul Alan al Louarn (1903) – selled ouz “Embann an Hirwaz” - ez eus 8  
kanaouenn n’o-deus netra da weled gand ar pezh-c’hoari. Teir a zo bet skrivet gand  
Taldir. Ar re all, nemed an troidigeziou, a hañval beza bet savet gand Garreg.  
Modernnaet eo bet an doare-skriva

## **E skol va farrez**

A-boan ma oan ken uhel ha botez eun archer,  
Ma oan kaset d’ar skol evid deski galleg,  
Hag euz ar yez-se c’hoaz ne ouien ket eur seurt ger,  
Ne ouien evel va mamm nemed ar brezoneg.

M’ho-pije va gwelet diskabell ha diarhen,  
Oh den em gavoud er skol, oll ho-pije c’hoarzet,  
Va genou, digor-brazn e peb leh e sellen  
Gand em fenn daoulagad eur bugelig dianket.

Reñket oh eur voger, evel ar zoudarded,  
Tro-war-dro d’eun ti-skol, me wele taolennou  
Warno livet e du pep seurt anevaled  
Gand an aotrou skolaer anvet lizerennou.

Med ne jomis ket pell eur hrouadurig gouez ;  
Soñjezonou nevez a deuas buan em spered ;  
An anevaled du, kentoh hag eiz devez,  
A oa deuet da veza va brasa mignoned.

Ma vijen bet ken fur ha m’oan mad da zeski,  
N’em-bije ket skubet an ti-skol d’ar pardaez,  
Med evel m’oan dibenn, ha ma karen c’hoari,  
Em-eus skubet, siwaz, leur an ti-skol aliez.

Biskoaz n’em-eus klemmet o chom e pinijenn  
Da houde beza greet eur farserez bennag,  
Leñvet em-eus avad o kaoud ar zimbolenn  
Evid komz brezoneg ; goulenn a rit perag ?

Ra zigoro Sant-Per din dor ar baradoz,  
M’em-eus hen gounezet dre gemend a zaelou ;  
Med penaoz pardoni d’an aotrou skolaer-koz  
D’am beza kastizet ‘vid komz yez on Tadou ?

# War Bont an Naoned

*(Anavezet mad eo ar ganaouenn-ze, med amañ ez eus gerioù all).*

Pa oan war bont an Naoned, ge landemoa libere (bis)  
Berjerenn o ouela, un, deux, trois, delira,  
Trois cavaliers de bois landemoa megare.

Me gweled eur verjerenn, ©  
War ar pont 'ouela, un, deux, trois, delira,  
Trois cavaliers de bois landemoa megare.

Petra 'h-eus-hu da ouela, ge landemoa libere (bis)  
Plahig din-me larit, un, deux, trois, delira,  
Trois cavaliers de bois landemoa megare.

Ma gwalenn er mor kouezet, ge landemoa libere (bis)  
Piou a yelo d'he zapa ? un, deux, trois, delira,  
Trois cavaliers de bois landemoa megare.

Petar rofet-hu din-me, ge landemoa libere (bis)  
Me 'yelo d'he zapa, un, deux, trois, delira,  
Trois cavaliers de bois landemoa megare.

Pemp kant skoed e aour, ge landemoa libere (bis)  
Mar gallit he zapa, un, deux, trois, delira,  
Trois cavaliers de bois landemoa megare.

Na d'ar henta ploñjadenn, ge landemoa libere (bis)  
Ar walenn oe gwelet, un, deux, trois, delira,  
Trois cavaliers de bois landemoa megare.

Ha d'an eil loñjadenn, ge landemoa libere (bis)  
Ar walenn oe touchet, un, deux, trois, delira,  
Trois cavaliers de bois landemoa megare.

Ha d'an deirved ploñjadenn, ge landemoa libere (bis)  
Ar mab a oe beuzet, un, deux, trois, delira,  
Trois cavaliers de bois landemoa megare.

E dad a oa er prenest, ge landemoa libere (bis)  
O komañs da ouela, un, deux, trois, delira,  
Trois cavaliers de bois landemoa megare.

Tri mab am-eus-me ganet, ge landemoa libere (bis)  
O-zri ez int bezuet, un, deux, trois, delira,

Trois cavaliers de bois landemoa megare.

E bered sakr an Dreinded, ge landemoa libere (bis)

'M-eus tri mab douaret, un, deux, trois, delira,

Trois cavaliers de bois landemoa megare.

## Kan broaduz Iwerzon (Let Erin remember)

*Troet gand ar Garreg War don : Al louarn ruz.*

Dalh, Iwerzon, eñvor amzer gwechall,  
Pa droas kein dit mibien fall ;  
Pa deuas ar helh aour gand Malaki  
Stard ouz ar maher oh enebi :  
Gand o friñsed pa'h ee, glan o banniel,  
Paotred ar *Bod Ruz*, da vervel,  
Perlezennig wer an tu-mañ d'ar bed  
D'an estren e roas he hened.

Diwar gerreg Lok-Nik, ar pesketaer  
Pa varv en noz yen ar sklêrder,  
A wel touriou moal an deveziou pell,  
Dindan ar wagenn don o sevel  
'N e huñvreou kaer ivez or spered  
'Wel aliez an Tremenet,  
Hag a gar dihun, a-dreuz an Amzer  
Brazderiou bet, kuzet 'n e donder.

# Lohaber

*Ton a Vro-Skos*

P'eo eet er bez yen ar mignon 'teus karet,  
Lez e dechou da hun gantañ 'barz ar vered ;  
Pe, mar sav al lenn taolet war o gorre,  
Gouel warne didrouz, hag o huz adarre ;  
Ha, ma ra poan ganit soñjal pegen pell  
Deuz hentchou ar *Sklêrder* 'oa troet e askell,  
Bez laouen o soñjal out bet ar sterenn  
He-desu hen distroet war-zu ar *Sklêrijenn*.

Da goantiri werh ha da zornig glan-te  
Eo a zeskas dezañ hent ar gwir ganarnte',  
Hag hen plegas dindan lezenn ar Gened,  
'Leh ar fals-doueou 'n-oa gwechall pedet.  
Dreist lannou eur vuhez pell dall ha garo,  
Te 'zavas 'vel ma sav war vor gwareg-ar-glao,  
Ha, mar c'hoarzas outañ eun eurvad pemdezieg  
War diwez e amzer, te 'n hini 'zo kirieg.

Pa glaske sevel mouez e youlou gwechall,  
Pa adpoanie ar Gaou d'e drei war an hent fall,  
N'oa ken 'med selled ouz kaerder da lagad,  
Ha pep fallentez 'nije kuit 'n eur bagad.  
Beleien an Heol, pa varv tan o aoter,  
N'hellont hen adc'hweza nemed ouz ar sklêrder ;  
'Vel-se, ma teue 'r Vad 'n e galon da zemplañ,  
Da zell c'hoarzuz hepken rente buhez dezañ.

## A-raog ar stourmadeg

Dre ar spi 'zav 'n or halonou  
O hedal emgann warhoaz,  
Dre an heol-mañ a h a da zegas  
Deom frankiz pe chadennou,  
Dalh soñj n'ez eus er vuhez  
Hep frankiz nemed c'hwerventez ;  
Evel an heol er wagenn,  
Ar stporumer 'n e vez 'ziskenn  
Dindan glao daelou puill e vroad !  
Eüruz an neb a gouez maro,  
War e dal bennoz tud e vro,  
Eur sked divavel war e oad :  
Mez pegen kaer maro ar re  
A gouez gand eur vriad lore !

Dirag ludu e dan brezel,  
An enebour drouglivet  
A zoñj er stourm leh on-doa brevet  
'Dan<sup>1</sup> on zreid lorch e vanniell,  
Diwallit na ve adskoulmet  
Ar chadenn on-doa diframmet.  
Klevit ! galv ar horn-bual !  
O ! 'barz ma vo noz teñval,  
Ra zono ganeom tro-dro laouen !  
Meur a galon, c'hoaz birvidig,  
A vo 'benn neuze maro-mik,  
Bouzar da vouez an Treh zoken ;  
Mez pegen dous hun diweza  
'N neb 'vo eur bobl deuz e ouela !

*Troet e brezoneg gand Ar Garreg<sup>2</sup>*

---

<sup>1</sup> 'Dan : dindan.

<sup>2</sup> *Troet e brezoneg gand Ar Garreg* : Ne lavar ket gand piou e oa bet savet ar skrid e galleg.

## An heizez kollet

Me 'zo eur bugelig paour  
Oh hirvoudi gand enkreuz.  
Kollet am-eus gwasoh 'vid aour,  
Kollet am-eus ma heizez !

### Diskan

O pegoulz 'retorni-te  
Davedon, ma heizezig  
Deus c'hoaz en-dro, deus c'hoaz din-me  
Pe goeñvi 'ray ma halonig.

Me 'zo eur bugel heb chañs !  
Ar gwiniz gwenn 'm-eus meset<sup>3</sup>,  
Mez unan all, gand drougrañs  
Siwaz, en-deus eñ medet !

Me 'zo eru bugel falleüruz,  
Kaled eo ma flanedenn !  
Ha ma spered anoazuz  
Ne gav ken nemed anken !

Me 'garje boud an avel  
'Vid redeg ar vro dre-oll  
Da adkavoud an Durzunell  
A zo 'vidon-me war goll.

### Diskan

Mez, birviken ne welin  
Ma heiziez ken war ar bed,  
An avel braz a lavar din  
Siwaz e' r paourig marvet !

Taldir (Jaffrennou)

---

<sup>3</sup> meset : dastumet.

## Kan-bale tud Vreiz

Sav, Breiz-Izel, d'an neh, da vanniellou  
Ruziet gand gwad on hendadou !  
Stagom d'or gouriz ar hlezeier hir  
Ra vo on divreh 'vel an dir !  
Lavarom oll euz a-bouez on fenn :  
Breiz da virviken ! Breiz da virviken !

Dihun, Breiz-Izel, ma mamm venniget  
Rag an deiz a zo degouezet !  
Or galv a ziston war benn ar mene'  
Hag a h entan peb ene :  
Breiziz, deuz pep parrez, a ziskenn :  
Breiz da virviken ! Breiz da virviken !

O youhadennou a red 'dreuz d'an êr  
Bete goueled ol lanneier,  
Ar mammou a zegas o bugale  
Da gavoud o zadou en arme :  
N'eus 'med eur youh en Breiz penn-da-benn  
Breiz da virviken ! Breiz da virviken !

Menez Bre ro dorn da Venez Kragou,  
Tridal a ra o hribennou :  
Anezo o-unan o reier a ruill  
War an enebour e kouezont puill ;  
Gwagenn ar mor a lar d'ar wagenn :  
Breiz da virviken ! Breiz da virviken !

Beteg ar gouelehiou ar re bella  
Ar horn a vrezel a vouda  
Hag a lar d'an oll boblou ezu ar bed  
Ema beo gouenn ar Vretoned !  
An avel vor yud en eur dremen :  
Breiz da virviken ! Breiz da virviken !

Kalonou an oll a zo entanet  
Hag an divreh a zo nerzet  
Paotred Vreiz Vihan ha Breiz Tramor  
A skoulm o daouarn dreist ar mor.  
Ollhalloudeg, ro 'n Treh d'az mibien :  
Breiz da virviken ! Breiz da virviken !

Taldir Ab Herninn (Jaffrennou).



